

KANNAD

ar Guilvinec ha Lechiagat

Conservez chaque numéro.

da len bep pemzecdez.

Lisez et faites lire.

(Les personnes qui désirent s'abonner au *Kannad* sont priées d'envoyer 2 fr. à M. de Kerangal, rue des Boucheries, Quimper.)

AN AOTROU N'ESKOB NEVEZ

En deveziou-ma eus deuet betek ennomp eur c'helou en deus karget a laouennidigez holl beleien ha tud fidel an Eskobti. An Aotrou DUPARC, person Lorient, a zo hanvet, gant hon Tad Santel ar Pab, *Eskop Kemper ha Leon*.

An Aotrou n'Eskob nevez, Adolphe Duparc, a zo ganet e kear Lorient, d'ar 6 a viz C'huevrer 1857. He vugaleach hag he iaouankis kenta a dremenas e Kemperle.

Goude beza bet epad pemzek vloas oc'h ober skol e sklolach Santez-Anna Vened, eo bet hanvet da berson e Lorient er bloavez 1895.

An Aotrou n'Eskob nevez a oar mad, a gredomp, brezounek he vro; brudet eo evit beza eur spered kaer, eun den goueziek, eur prezezer dispar hag eur belek aketus da zoursial euz an eneou ha da zifen guirioù an Iliz.

Anavezet eo ive evit beza devot da zantez Anna, patronez Breiz-Izel, ha patronez ar var-toloded. Goude beza great he studi, eo bet epad pell amzer oc'h ober skol en eur skolach a zoug hano santez Anna hag a zo stag euz he zi; hag en he chapel eo e vezo sakret Eskob d'ar 25 euz ar miz-ma pe divezatoc'h.

Leac'h zo eta da gredi eo bet an Aotrou Duparc choazet gant santez Anna evit beza Pastor he bugale ger hag, a dra zur, morse bennoz ha skoazell Patronez Breiz-Izel ne van-kint d'an Aotrou n'Eskob nevez.

Kannad ar Guilvinec ha Lechiagat a bed an Aotrou Duparc da zigemeret he zantimanchou

a respet, a zoujans, a garantez, hag a c'houlenn digant Doue, dre intercession santez Anna, buez hira ha nerz paduz evit ar Pastor mad o deus he lennerien kement a hast da velet.

GOUEL AR CHANDELOUR

Purification ar Verc'hez — Jesus kinniget en templ.

Pa deuas deveziou purification Mari hervez lezen Moyses, e cassjont ar bugel da Jerusalem evit he ginnig en templ, rag skrivet eo e lezen an Aotrou Doue : Peb paotr kenta-ganet gant he vamm a vezo kinniget d'an Aotrou Doue. Rei a dlient ive ar sakrifis, hervez m'eo skrivet el lezen : eur c'houblad turzunelled pe diou goulm vihan.

Hogen, bez 'ez oa neuze e Jerusalem eun den hanvet Simeon. An den-ze a ioa just ha leun a zoujans Doue. Gortoz a rea konsolation Israël hag ar Spered-Santel a ioa ennhan. Diskleriet oa bet dezhan gant ar Spered-Santel ne velje ket ar maro 'araog m'han dije gullet Salver ar bed. Dont a reas d'an templ poulzet gant Spered Doue. Ha pa edo kerent Jesus o tigas anezhan, abalamour da ober evithan ar pez oar boazet hervez al lezen, her c'hemeras etre he zivireac'h hag e trugarekeas Doue en eur lavarret :

« Breman, Aotrou, lezit ho zervicher da vont e peoc'h, hervez ho ker, rag va daoulagad ho deus gullet ar Zalver a deu ac'hanoc'h, an hini oc'h eus lakeat dirag fas an oll evit beza sklerijen ar boblou paian ha gloar ho pobl Israël. »

Tad mager Jesus hag he vamm a ioa estlammet gant an traou a lavaret divar he benn. Simeon a vennigas anezhan hag a lavaras da

Vari, he Vamm : « Ar bugel-man a zo lakeat evit koll ha silvidigez aleiz a dud en Israël, hervez an implij a reint deuz he c'hrassou, hag evel eur sin a vezo enebet outhan. Hoc'h ene-c'houi a vezo treuzet gant eur c'hleze : dre eno e vezo diskuliet ar menoziou a zo e meur a galon . »

Bez'ez oa ive neuze e Jerusalem eur brophetez, he hano Anna, merc'h da Phanuel, deuz rumm-dud Aser. Ar vaouez-se o veza ive digouezet en templ d'an heur-ze, a veule an Aotrou Doue hag a gomze deuz ar bugel da gement hini a c'hortoze redemption Israël.

Pa ho doa great peb tra hervez lezen an Aotrou Doue, Joseph ha Mari gant ar Mabik Jesus, a zistroas d'ar Galilee, d'ho c'hear Nazareth.

BEAU TRAIT D'UN GÉNÉRAL FRANÇAIS

Un de ses amis dit un jour au général de Miribel, intrépide soldat, mais chrétien plus intrépide encore : « Général, pourquoi vous obstiner à remplir publiquement, et à la ville et à la campagne, vos devoirs de chrétien ? Ne comprenez-vous pas qu'auprès d'un gouvernement franc-maçon, la façon dont vous affirmez votre titre de catholique vous barre le chemin des honneurs ? »

— « Je m'en moque ! répondit-il. J'ai deux devoirs à remplir : le devoir du chrétien et celui du soldat.

» Loin de s'exclure, ces deux devoirs s'entraident et se fortifient. Je suis toujours prêt, quand il faudra, à donner mon sang et à sacrifier ma vie ; mais ma conscience ! mais mon âme, jamais ! »

Admirable parole, mais conduite plus admirable encore : Soyons donc fiers de notre titre de chrétien ; ce titre nous fait enfants de Dieu ! Là est la vraie grandeur ; là est aussi le fondement de notre gloire future et de notre bonheur éternel au paradis.

Eun ifern a zo.

Testeni an holl boblou.

Voltaire zo anavezet gant an holl, evit unan euz brassa enebourien ar Relijion. Hogen, eun devez e teuaz d'he gaout eur mignoun, difeiz

eveld'han. « Voltaire, emez'han, deut oun a benn da zestum testeniou awalc'h : *N'eus ifern ebet.*

— » Na te a zo eurus, a respountas Voltaire. Evidon-me zo c'hoaz pell dioc'h enho. »

Goulskoude, klasket en doa guella ma c'helle, ar skrivagnour difeis-se, digareziou ha rezoniou evit gellout nac'h, orjellat ha diskar ar virionez-se. Ma ranke anzae eta, n'en doa kavet rezoun vad ebet, eo, a dra zûr, abalamour n'eus gour ebet : abalamour eo ar virionez-se diazezet stard var rezoniou goest da lakaat peb den a spered eün, da rei d'ezhi *assant he volonte.*

Unan euz ar rezonniou-se eo : *kreden an holl boblou.*

An holl boblou a zo bet, kerkouls hag ar re a zo brema, n'o deus holl nemed eur vouez evit lavaret d'eomp ez euz eun *ifern.*

Ne goimzan ket ama euz ar *boblou katolik* na kennebeut euz ar bobl a Israël guech all ; an holl a c'hoar o deus ar re-ma lakeat ato ar feiz en ifern er renk kenta etouez ar guirioneziou a zo red da gredi evit beza salvet ; komz a ran ebken euz ar *boblou paian.*

Epad ar pevar mil bloaz kenta euz ar bed an holl boblou euz an douar, kouls lavaret, a ioa paian, da lavaret eo, a adore doueou faoz.

Lod a adore an heol, al loar, ar stered ; lod all a adore tud eveld'ho bet brudet en ho amzer. Darn all c'hoaz a adore *idolou*, da lavaret eo, patromiou pe imachou great gant pri pe gant koat, gant aour pe gant arc'hant. Darn all erfin a adore evel doueou al loened gouez pe anevaled don ha betek zoken al louzeier euz ho jardinou.

Mad, tra souezus hag estranch, an holl boblouze a grede en *Ifern* ; a grede ez eus er bed all eur plas a boaniou evit an dud fall hag e pado ar poaniou-ze da viken.

Ar pezh a lavaran ama a zo merket sklear e levriou great gant paianed hag a veve araok donidigez hor Zalver, levriou hag a zo deut betek ennomp.

En hon amzer-n'hi ez eus c'hoaz ive kalz poblou paian. Bez'ez eus anez'ho e broiou tomm an Afrik hag e kreiz koajou bras an Amerik. Mad, etouez an oll boblou-ze, ar visionerien o deus kavet ato hag a gav bepred eun anaoudegez bennek euz an Ifern, eur greden bennak ez eus er bed-all eur plas a boaniou evit an dud fall, hag e vezo ar *poaniou-ze eternal.* Hag e c'houlennan

eta, goude an taol lagad-ze great var kreden an holl boblou paian : Pe fur, pe diskiant eo, an hini a ia eneb eur virionez chomet en he zav var an douar e peb amzer hag e peb bro, etouez an holl boblou euz ar bed ?

Grit, lennerien, ar respount a garfot. Evidon-me a gred eo mad beza a unan gant eur skrivañnour demdost ker brudet a Voltaire ha da viana ken difeiz hag-hen, *Henri Heine.* Hema en deus skrivet ar c'homzou-ma :

« Goude beza taolet evez var gement zo bet lavaret ha skrivet gant an holl boblou, var arpez a zell euz ar vuez da zont em beus gullet sklear, eo red anzae ez eus eun Doue evit barn hon oberou, hor beus eun ene ne varvo ket, ez eus goude ar vuez-ma, eur vuez all hag er vuez-se ar mad a zo *rekompanset* hag ar fall *punisset.* »

Les Commandements du diable.

Dieu ni maître tu n'auras,
C'est le premier commandement.

Tout à ton aise jureras
Et mentiras effrontément.

Sans avoir peur tu voleras
Pour t'enrichir commodément.

Au besoin assassineras
Le bon bourgeois récalcitrant.

Dans la débauche tu vivras
En véritable sacripant.

Curés et Sœurs insulteras,
Pour te donner de l'agrément.

D'absinthe tu t'enivreras
Chaque jour régulièrement.

La Carmagnole hurleras
Dans la rue énergiquement.

Le Vendredi-Saint mangeras
Du cochon exclusivement.

Et comme un chien tu crèveras
Ayant vécu semblablement.

APPARITION GENTA AR VERC'HEZ E LOURD

Ar Verc'hez Vari zo en em ziskuezet trivac'h guêch e Lourd ; setu aman e berr gomzou histor an apparition genta.

D'an unnek a viz C'houevrer 1858, eur verc'h a bevarzek vloaz, he hano Bernadett Soubirous, a ieas gant diou blac'hik all da glask keunet var bord ster ar Gave, e kichennek Lourd.

Eur iaouvez oa ; Bernadett a ioa digouezet a zirak Grott Massabiell pa zounas an Angelus. Kerkent ar plac'hik a glevas eun trouz henvel ouz eun taol avel, hag e velas er Grott evel eur goabren aour hag ebarz : « eun itroun iaouank guenn evel eur rozen, kaeroc'h c'hoaz eget ar sklerder a ioa en dro dez'hi.

» Bez e doa doare eur plac'h iaouank a c'huezek pe zeitek vloaz. Guisket oa gant eur zae ven stardet en dro dez'hi gant eur ruban glaz, a ioa he zaou ben ejed gant an ezen. Var he fenn, e touge eur ouel guenn ive, a veac'h ma velet dindan-han he bleo, hag a ziskenne ken koant a tra izeloc'h eget he c'hroaz-lez. He zreid a ioa noaz, mes goloet oant gant plegou izela he zae, nemed ar begou, hag e velet o lintra var bep unan anez'ho eur rozen melen aour. Ouz he breac'h diou e talc'he eur chapeled gant greun guenn skeduz hag eur jaden aour e doa liou ha sked an diou rozen ioa var he zreid. »

Bernadett, er penn kenta a grogas aoun enhi ; mes he aoun ne badas ket pell, hag eb sonjal petra rea, e kemeras he chapeled hag e kuezas var he daolin. An itroun gant he fenn a ziskuezas dez'hi e rea mad, hag Hi ive a lakeas da rinklaretre he bizied greun skeduz he chapeled, mes he muzellou ne finvent tam. Etre peb dizenez, en eur zevel he daoulagad ken douz varzu an env, e lavare : « Gloar d'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered-Santel ». Pa oue echu ar chapeled, an itroun a ieas kuit, ha ganthi oll sklerder ar Grott.

Abaoue he apparisionou, ar Verc'hez ne baouez ket da ziskuez he madelez ha da skuill he grassou e Lourd. Hen diskuezet e deus dreist oll, er bloavezh tremenet, epad ar *Pelerinach national.* Hervez gazeten (annales) itroun Varia Lourd, morse medisined ar *Bureau* n'o deus gullet kement a bareansou burzudus. Lourd a zo deuet da veza eul leac'h santel, anavezet gant kristenien ar bed-holl.

D'an unnek euz ar miz-man ema Jubile hanter kantved itroun Varia Lourd. An devez-ze a vezo eur gouel kaer evit holl zervicherien Mari.

Red e vezo kemeret perz ennhan, dont da offeren an Apparition a vezo lavaret en devez-se

e peb parrez, tostaat euz ar sakramanchou ha pedi kalounek Itroun Varia Lourd evit holl ezommou an Iliz hag ar Franz.

Induljansou evit Jubile Itroun Varia Lourd.

D'ar 27 a viz Du diveza, an Tad Santel ar Pab Pi X en deuz aotreet d'ar gristenien euz ar bed oll a ielo d'an oferen hag a lavaro heno unan pe unan euz pedennou an Iliz en honor d'ar Verchez, bep unnek euz ar miz azalek an 11 a viz C'houevrer 1908 d'an 11 a C'houevrer 1909, eun induljanz a 7 vloaz hag 7 guech daou-ugent dervez.

Hag ouspen, eun induljanz plenier a c'hello gounit nep a raio kement-ze c'hueac'h guech da nebeuta d'an unnek euz ar mizioù a vezo etre an 11 a C'houevrer 1908 hag an 11 a C'houevrer 1909.

DORN DOUE

Brema ez 'eus bloas, chapel leanezed Karmez e Siel a zo bet profanet en eun doare iskiz gant eun toullad Framasoured.

Eul lein vras a ioa great gantho ebars. Goude ar fest, unan anez'ho a ieas da ziskar ar Groaz a ioa var an tabernak, ha gant eun taol botez e torras he zivesker d'hor Zalver.

Er memes amzer, eun all a bignas er gador brezeg evit layaret diotachou ha dislounka a bep seurt blasfemmou.

Doüe n'en deus ket gedet ar bed all evit punissa an torfejou sakrilach-ze. Abaoue, ar c'henta anez'ho, depute departamant an Ardennes, a zo bet e ziou c'har troc'het dez'han gant an train, e gare Hazebrouk. An eil en deuz kollet he benn hag a zo ranket e zastum hag he lakaat etouez an dud sot ha danjerus. Pebez kentel !!

En eun eured, brema ez eus eur pennad amzer, eun den iaouank a glanvas hag a gouezas d'an douar semplet. En em zestum a reas an dud en dro dez'han evit he zevel, hag unan n'hen anaie ket a c'houlennas digant eun all : « Euz a anaoudegez piou eo hema, emezhan, euz a anaoudegez an den nevez pe euz a anaoudegez ar plac'h nevez ? »

— » Sikour atao he zevel, eme egile ; ne veles-te ket, n'en d'eus anaoudegez ebet ! »

LEURS RENGAINES

— *Il ne faut pas être bigot.*

Personne ne vous demande cela. Mais il faut être chrétien.

— *Il y a trop de superstitions dans la religion.*

Vous ignorez donc que c'est au contraire la religion qui déclare que la superstition est un péché ?

— *Ceux qui veulent des prêtres n'ont qu'à les payer.*

Soit, mais alors que ceux qui veulent des théâtres, des écoles laïques, etc., les paient également !

ACTES PAROISSIAUX

Guilvinec.

Baptêmes :

- 16 Janvier, Augustine Biger ;
18 — Thomas-Marie Daoulas ;
18 — Treffina-Marie Cossec ;
19 — Marcel-Joseph Olivier ;
19 — Michel Le Roy ;
22 — Michel Le Goff.

Mariages :

- 21 Janvier, Yves-Nicolas Penven, et Joséphine-Louise Trévidic ;
21 — Michel Olivier, et Marie-Jeanne Courtès.

Décès :

- 14 Janvier, Jean-Louis Péron, 10 jours.

Treffogat.

Baptêmes :

- 18 Janvier, Germaine-Marie Gloaguen ;
27 — Laurent-Corentin-Marie Daniel.

Le Gérant : P. DURAND.


KANNAD

ar Guilvinec ha Lechiagat

Conservez chaque numéro.

da len bep pemzecdez.

Lisez et faites lire.

(Les personnes qui désirent s'abonner au *Kannad* sont priées d'envoyer 2 fr. à M. de Kerangal, rue des Boucheries, Quimper.)

An Aotrou DUPARG,
hanvet Eskob Kemper ha Leon.

D'AR RE A GEMERO ENEP GUIR MADOU ILIZ

An Tad Santel ar Pab, evit rei sklerijen da goustianz ar gristenien e kenver madou an ilizou, en deus roet ar gelennadurez-ma a-nevez 'zo d'an Eskipien :

Pec'hed hag *eskumunugen* 'zo evit ar re a zalc'h enep guir madou Iliz :

1° Araok beza bet aotre an Aotrou'n Eskop den ne c'hell, ep na ve dre-ze *laër* ha *sakrilaj*, prena madou iliz, *arreubeuri* pe *leve*... Ne c'heller ket ken nebeut ho c'hemeret digant ar re o divije ho frenet.

2° Dirak Doue ha dirak an Iliz ar verzedigeziou-ze a zo *null*. Kendaze ar *brenerien* a rank restaol d'ho guir perc'hen ar madou a zalc'hfent enep guir, ha ne ket hi ebken, mes ive kement hini en defe bet euz ar madou-ze pe digant ar c'henta, pe an eil prener, pe dre heritaj, pe dre eur c'hontrad all bennak. Ma ne restaol ket an hini 'zo ganthan da ziveza ar madou-ze, kement hini en do bet anezho en he raok a dle restaol an dalvoudegez.

3° Oc'hpen, dalchet int da lakât lavaret an offerrennou pe seveni an oberou all a ioa var al leveou-ze.

4° Poan an eskumunugen. Ar re a bren evitho madou Iliz pe ar re ho c'hemer digant re all o doa ho frenet enep guir, ar re-ze a guez dindan an *eskumunugen*. Ne c'hellont kaout absolven, ma ne vezont ket en artikl ar maro, nemed digant ar Pab, pe digant eur belek en deus bet digant ar Pab galloud evit an dra-ze.

5° Merourien pe fermourien ar madou Iliz dalc'het enep guir a ra ive eur pec'hed a laeroni sakrilaj hag a guez, evel ar brenerien, dindan an *eskumunugen*.

6° Difen 'zo ive d'ar Gonseillerien ti-kaër ha d'ar Buroiou hanvet « de bienfaisance » da brena pe da fermi leveou pe madou Iliz, ep aotre, ha kement-se dindan boan a bec'hed marvel. N'eus goulskoude evit an dra-ze eskumunugen ebet.

Heb relijion an den ne c'hell ket beza eurus.

N'eus ket pell, e Lourd, pelerined hor bro a oa o vont d'ar grott, holl laouen, 'neur gana ar c'hantik kaër-ma : « Ni zo Arvoris, tud n'o deus nemet eun tenzor, mes eun tenzor euz a behini

ez 'omp fier : *hor feiz* ». Demdost dezho e voa eun aotrou guisket kaër, ar groaz var he stomok ha ne eane da vouela. Eun druez oa e velet.

Unan euz ar belerined a ieas d'he gaout hag a lavaras d'ezhan : « Ganeoc'h-c'hui, Aotrou, ez euz digouezet; evit doare, eun drouk pe eur c'holl bras benak. » — « Fazia a rit, emezhan, ne vouelan nemed abalamour ne m'eus ket a feiz ! Beza em euz iec'hed ha danvez, savet oun en eur garg huel, n'eus forz, me garfe beza e plas ar paoura euz ar Vretouned-se ! »

An den-se a oa maleurus hag a vouele abalamour ma n'en devoa ket a relijion. E leor he govessionou, sant Augustin a lavar d'eomp ar memes tra : « Araok dizrei ouz Doue, emezhan, ne vanke din na madou, nag henoriou, na plijadurezoù, netra hervez ar bed ; ha goulskoude me oa eun den maleurus meurbed. Perak ? Abalamour Doue en deus krouet an den evithan ha ken en devezo an den kavet Doue, he spered a vezo nec'het hag he galon trubuliet. »

Kement-se ne ket eston : an den en deus eur spered a c'houlenn anaout Doue, ar virionez memes. C'hoant bras en deus da c'houzout evit petra eo bet krouet ha lakeat er bed ; petra e teuo da veza goude he varo. Hogen ma n'en deus ket a relijion, n'en devezo ket a anaoudegez euz an traou-ze, he spered a vezo bepred dies ha nec'het bras ; heb relijion e vezo var an douar evel tud a ia gant ho hent heb gouzout euz a beleac'h e teuont ha da beleac'h e zeont.

An den en deus eur galon a c'houlenn karet Doue. Setu perak kaër en devezo an den destum madou, kaout henoriou ha plijadurezoù, ma n'en deus ket a garantez evit Doue he galon a jomo goull hag a vezo en drubuill.

Evit koumpren mad ar virionez-ma n'eus nemet sellet ouz an dud en dro deomp. Pere eo ar re drista ? Ar re a vev er pec'hed, hag en em ro d'an dizurch. Ar remors hag an dizesper a zo en ho c'halon, a deu da denvalaat ho fenn ha da ampouezouni ho buez, ar seurt tud-se a veler alies o tont da en em laza.

Pere eo ar re laouenna ? Ha ne ket ar re a heuill-mad ho relijion hag a vev e stad a c'hrass eo ?

Ia guir eo, heb relijion an den a zo unan euz ar re valeurusa. Var an douar, ha goude he varo n'en deus da c'hedal nemet an ifern.

Evelse eta arabat gelver madoberourien, mes enebourien ar bobl ar re a deu da denna diganthan he feiz, ar guella euz an holl vadou.

L'impiété rend malheureux.

Du 1^{er} Janvier au 1^{er} Novembre 1907, 125 hommes ou femmes se sont donné ou ont essayé de se donner la mort, au pays d'Yonne.

Il s'ensuit que c'est dans le département le plus irréligieux de France qu'il y a eu le plus de suicides l'année dernière.

TOI ! PENSEUR ! ALLONS DONC !

Toi, penseur ! En toute ta vie, tu n'as pas vieilli d'une minute, tu n'as pas compris une page d'histoire, tu n'as pas vu pousser un grain de blé. Le plafond des estaminets t'a perpétuellement dérobé l'aspect du ciel, le clapotement des parlottes t'a empêché d'entendre la pensée du genre humain. Tu ne sais pas qu'il y a un Dieu ; tu ne sais pas qu'il y a une justice et une immortalité ; tu ne sais pas même qu'il y a des hommes, et quand tu dis que l'homme descend du singe tu ne sais pas pourquoi tu dis cette sottise-là. Et il n'est pas entré une idée chrétienne dans ta cervelle, et il ne s'est pas formé une goutte de sang français dans ton cœur, car le vrai sang de France est fait de l'eau du baptême et du froment de l'Eucharistie que tu ne connais pas.

Tu appartiens à cette race qui ne vient pas du singe, mais qui en effet y va ; cette race qui n'est pas bénie aux entrailles maternelles par la vertu du sacrement de mariage, qui entre mal dans la vie, qui ne reçoit pas le baptême ou qui l'abjure, qui ne reçoit pas l'Eucharistie ou qui la profane, qui ne se lave pas aux fontaines pures, et qui laisse épaissir sur son intelligence la crasse du péché.

Tu n'as pas dans l'âme la vieille loi et la vieille flamme de la patrie et sa langue n'est pas dans ta bouche qui sonne des paroles de renégat ou d'étranger. Tu n'es en France qu'un séditieux, insolemment dressé contre l'âme et contre la loi de la patrie.

LOUIS VEUILLLOT.

Meur a zoare da ober an aluzen.

Evit lod n'eus nemet eun doare da ober an aluzen, rei eun tam bara d'ar paour keaz a deu da lavaret he Bater eharz dor ho zi.

A dra zûr, eun dra vad eo rei da zibri d'ar re ho deus naon, guiska ar re a zo en noaz ; mes aluzennou all ken kaër ha kaëroc'h zoken a c'heller ober.

Ne ket ar re a ia euz an eil dur d'eben da glask bara eo atao ar re 'zo dinna a druez :

Epad ar c'hampagn brilli, eur martolod a gouez klanv, ne c'hell ket labourer. Daoust ha n'en deus ket izom da veza rekouret ? He genreudeur, ar mestrouer hag an ekipach, en eur gendelc'her da rei d'ezhan he loden, ar ra eta eun aluzen euz ar re gaëra.

Setu ama eur vamm dalc'het var he guele gant ar c'hlenved, ne deus en dro d'ez-hi nemet bugaligou vian. Daoust hag an dud a ia d'he guele, da ober he labour, da farda ar boued ha da voalc'hi an dillad, ne reont ket oberou a garantez euz ar re vella ?

Er bloavez tremenet, en unan euz an diou barrez e pere e ve lennet ar *C'hannad*, eur c'hreg a zo marvet hag ar pez 'zo bet ebken pen-kaoz euz he maro, eo rankout mont da voalc'hi re abred goude beza bet he c'hrouadur. An hini e dije bet ar vadelez da ober an tam labour-ze en he leac'h, e dije bet saveteet d'ez-hi he buez.

Arabat e c'hoarvesfe ar memes tra er blâ-ma. Ra zalc'ho ar gristenien sonj euz ar pez o deus desket er C'hatekiz divarben Kommunion ar Zent : ez 'int bugale deuz ar memes famill ha memproù deuz ar memes korf. Ra zeuint eta holl da en em garet ha da en em zikour an eil egile, rak hor Zalver en deus lavaret en he Aviel : Bep gueach m'o peus great eur vad d'an disterra euz va breudeur, d'in-me va unan eo o peus her great.

Eur ger d'ar Besketerien.

Kambr an Deputeed 'e deus bet votet brema zo daou vloaz eul lezen hanvet e gallek : lezen ar « repos hebdomadaire ». Ervez al lezen-ma an holl vistri a dle rei d'ho micherourien, eun devez ehan bep sizun. An deputeed, a ra siouaz

kement a labour fall, o deus labourer mad var ar poënt-ma ! Goulskoude, al lezen-ma douget evit mad al labourerien ne diz ket ar besketerien. Kement-se abalamour ar beskerez ne c'heller ket atao he ober pe vez c'hoant. An dra-ma zo guir rak evit pesketa eo red delc'her kount euz an amzer ha meur a dra all c'hoaz. Daoust neuze, var digarez n'eo ket douget lezen ar « repos hebdomadaire » evidoc'h-c'hui, martolod, va mignouned, ha c'hui hoc'h eus guir da labourat bemdez ? Nan. Rak, huelloc'h eged lezennou an dud ema lezen an Aotrou Doue, a ordren d'ar vartoloded evel d'ar re all miret *an holl* zuliou. Eun dever eo eta evidoc'h plega d'ar gourc'hemen-se.

A dra zûr, ne ket digareziou a vank d'an hini en deus c'hoant da vont en he eneb, mes ne gredan ket en defe rezon vad ebet.

C'hui a lavar : ar pesked a deu hag a ia dre ar mor a vandennadou ha ne reont nemet tremen. Red eo eta d'ar martolod beza da bep amzer var c'hed anezho evit ho zapout pa vezint o tremen.

D'an digarez-se e c'heller respount ha lavaret penaos ar pesked pa dremenont evelse dre ar mor, a zo atao poulzet gant eun dra bennak ; hogen peguir providans Doue a laka ar bed da vont en dro, e chell ive lakaat ar pesked da zont ha da jom e moriou Breiz. Evit eta meritout ma teuo Doue da zikour bolontez vad an dud a vor, eo red d'an dud-ma lakaat ive ho bolontez vad da zenti euz he lezen.

Eun digarez all a gaver choaz : « Me, a lavar, ar mestrouer, me ne c'hellan ket chom en douar da zul, rak neuze, heb dale ne ve mui martolod ebet ganhen ; guele e vent o vont holl da c'houlenn beza digemeret gant eur mestrouer all ».

« Ha me, a lavar ar martolod iaouank, ar garfe chom da zul en douar ; mes kement-se a lakai ac'hanon da goll va bara ; rak ar mestrouidi a glasko re all da vont gantho ha me a jomo en douar, da drei mein da zec'ha ».

Peb hini eta, a fell d'ezhan n'em zizamma ha taoler ar beac'h var diskoaz unan all. Mes peguir ema an traou evelse, me gred e c'helfer n'emp entent.

Holl ez oc'h bet badezet, holl e tougit an hano a gristen, ha n'eus ket en ho touez eun anter dousen hag a garfe mervel evel chass heb dour benniget na sakramant. Etre kristenien e tlefer

eta gellout 'n'emp goupren evit n'emp entent mad da c'houde ! Sûr oun e c'helfec'h ma karfac'h n'emp glevet etrezoc'h, c'hui mestrouidi, pe guelloc'h choaz, mestrouidi ha martoloded, evit ehana d'an devez sul. Kaër zo ha kaër a vezo, Doue eo ar Mestr, ar Mestr bras, mestr an holl e chommo ; hon interest a c'houlén eta, ma hen lakaimp a du ganheomp.

Unan bennak martreze, a lavaro : « Me, ne gredan ket e seurt konchenou, me zo « *libr-penseur* ». Mes neuze eta ma kavit hoc'h eus guir da zonjal ha da ober evel ma karit, e tleit kaout mad ive e sonjfe hag e raffe ar re all evel ma plij d'ezho, ha ma plij d'ezho mont d'an offeren e tleit ho lezer da vont. Anez eo ar gaou ar pez a livirit, peguir e lakit ar re all da ober nan ar pez a blij d'ezho, mes ebken ar pez a blij deoc'h honan ! E peleac'h ema al liberte neuze ?

E guirionez netra na c'hell miret ouzoc'h da en em entent, mestrouidi ha martoloded. Peb tra er chontrol a c'houlén diganeoc'h asten an dorn an eil d'egile evit ma reno ar peoc'h en ho touez ha ma c'hello dre-ze an hini en deus c'hoant, santifia ar zul.

Dek Kuzul-Vad.

1. Ne rit ket da eun all ober al labour oc'h goest da ober hoc'h-unan.

2. Ne zispignit ket hoc'h arc'hant araok beza he c'hounezet.

3. Ne brenit morse eun dra ha ne dle ket servij deoc'h.

4. Diouallit euz an ourgouil ; muioc'h a boan a rafe deoc'h eget an naoun, ar zec'hed, ar ienijen.

5. Epad ho pred, drebit atao nebeutoc'h eget ho c'hoant.

6. Ne lezit ket da ober a benn varc'hoaz ar pez a c'hellit da ober hirio.

7. Karit al labour : morse ne skuis eun den oc'h ober ar pez a blij d'ezhan.

8. Ne zammit ket re ho kalon : Nag a boan spered e kemeromp aliez gant traou ha ne teuint birviken betek ennomp.

9. Kemerit peb tra evel ma 'zo dereat.

10. Drouk zo ennoc'h : kontit betek dek araok lavaret grik ; mar santit ho kalon o virvi, kontit betek kant.

E ti ar medisin.

« Aotrou, paket am eus eur pennad sifern euz ar re voassa, petra a rankan-me da gemeret evit-se ? »

Ar medisin, goude beza chomet eur pennadik da sonjal, a respount :

« Eur mouchouer, na petra-ta ! »

LEURS RENGAINES

— *Les Religieux sont des ignorants !*

Des ignorants ? Ah bah ! Et on ne peut pas soutenir leur concurrence dans l'enseignement.

ACTES PAROISSIAUX

Guilvinec.

Baptêmes :

- 1^{er} Février, Yvonne-Corentine-Marie Palud ;
5 — Alexis-Eugène Tanneau ;
5 — Jean-Louis Pascal ;
6 — Marie Cariou ;
8 — Albertine Biger ;
8 — Louis Moysan ;
8 — Marie Volant.

Mariages :

- 28 Janvier, Yves-M^{ie} Floch et Marie-Anne Coïc ;
11 Février, Alain-Pre Boennec et Marie Cariou.

Décès :

- 31 Janvier, Michel Le Goff, 8 jours ;
1^{er} Février, Henri Coïc, 7 mois ;
10 — Marie-Louise Le Bléis, 58 ans.

Treffogat.

Baptêmes :

- 5 Février, Marc Baudry ;
9 — Anne-Marie Le Nours ;
10 — Louis-Léon-Ferdin^d-Basile Stéphan ;
10 — Fiacre-Marie Hélias.

Le Gérant : P. DURAND.

KANNAD

ar Guilvinec ha Lechiagat

Conservez chaque numéro.

da len bep pemzecdez.

Lisez et faites lire.

(Les personnes qui désirent s'abonner au *Kannad* sont priées d'envoyer 2 fr. à M. de Kerangal, rue des Boucheries, Quimper.)

Jesus tentet gant an Drouk-Spered.

Goude beza bet badezet gant Sant Ian e ster ar Jourden, Jesus e oue kasset gant ar Spered-Santel en eul leac'h distro evit beza tentet gant an diaoul. Ha goude m'en devoue iunet a hed daou-ugent devez ha daou-ugent nosvez e teuas naon d'ezhan. Neuze an tenter o tostaat a lavaras d'ezhan : « Mar d'oc'h Mab Doue, livirit d'ar vein-ma en em chench e bara ». Jesus a respountas d'ezhan : « Skrivet eo : N'eo ket hebken gant bara a vev an den, mes gant kement komz a zeu euz ginou Doue ».

Neuze an diaoul a zougas anezhan da Jerusalem, ar gear zantel, hag ouz he lakaat var al leac'h huella euz an templ, e lavaras d'ezhan : « M'ar d'oc'h Mab Doue, en em daolit d'an traon, rak skrivet eo, hen deus kemennet d'he elez kaout evez ac'hanoc'h hag ho kemerint etre ho daouarn gant aon na stokfe ho troad ouz eur mean bennak ». Jesus a lavaras d'ezhan : « Skrivet eo ive : Ne dentoc'h ket an Aotrou ho Toue, ne c'houlennoc'h ket eur burzud heb ezom ».

An diaoul hen dougas c'hoaz var eur menez huel bras, hag o tiskues d'ezhan holl rouanteleziou an douar gant ho sked e lavaras d'ezhan : « An traou-ze holl me ho roi d'ehoc'h ma stouit dirazon ha ma c'hadorit ac'hanon ». Neuze Jesus a lavaras d'ezhan : « Kerz adren, Satan ! rak skrivet eo : Adori a reot an Aotrou ho Toue, ha ne zervichot nemethan ». Neuze an diaoul hen lezas ha setu an elez o tostaat hag ouz he zervicha.

Hor Zalver Jesus-Christ a les an Drouk-Spered d'he denti, evit rei deomp da entent ne

dleomp ket esperout beza hep tentasion, n'euz forz e pe stad e vemp, n'euz forz peger santel bennak e ve hor buez ; hag ive evit deski deomp an doare da drec'hi an dentasion, trei kein rak-tal d'ar pezh a c'helfe beza ar pen-kaoz d'eomp da offansi an Aotrou Doue.

Ar c'hampagn brilli.

Martoloded Guilvinec ha Lechiagat o deus koumanset ho c'hampagn brilli.

N'eus micher ebed ken tenn ha ken danjerus eget hini al lazourien brilli. Noz-de emaint o tastum ienijen, o terri ho c'horf, o riskla ho buez.

Ra dremeno ar c'hampagn heb darvoud, heb malheur !

Ra vezo mad ar besketerezh, evit ma vezo bara var ar planken, hag eun tam laouenedigezh e pep ti !

Mes evit-se n'eo ket aoualac'h d'ar martolod beilla var he vuez ha labourat, red eo d'ezhan ouспен goulenn skoazel digant an Hini a c'hell miret ouz ar mor da lounka he vag ha lakaat ar brilli da zont teo var ar c'hostez.

Ra vezo eta benniget ar vag ! Ra vezo lavaret ar pedennou ebars peb mintin ha bep noz, evel ma vez great en tiez kristen !

Perak ne vije ket pedet er vag ? Daoust hag an den n'en deus ket kement a ezom euz a Zoue var vor eget var zouar ? Petra a zo kaeroc'h da velet eget tud keiz, a rank gounit ho boued en eur grogen vian var eur mor bras, o sevel ho daoulagad varzu an Env hag o lavaret assambles da Zoue : Roit *deomp hirio* hor bara, roit ho pen-

noz d'hor labour ha lakit ar pesket da vont ebars hor rouejou. Hon *diouallit dioc'h* an drouk, beil-lit var hor buez, var hor bag hag hor rouejou, ha mirit ouzomp da vont da goll.

Ar vicher a zo tenn hag ar martolod, goude beza labourer c'huec'h devez ha c'huec'h nosvez, heb ean koulz lavaret, en deus ezom da jom en aod evit diskuiza eun tamik hag ive evit chench rouejou, koltari hag ober al labourou all var dro he vag.

Pe seurt devez repuza ? Ar vartoloded o deus feiz a vez gullet bep bloas o chom en aod d'ar zadorn da noz. Evelse e c'hellont dont d'an offeren d'ar zul, evel ar gristenien all.

Ar vartoloded difeiz, ma o deus skiant evit anaout ho interest, ne daint ket ken nebeut en deriv d'ar zadorn da noz, rak ar pesket paket en nosvez-se ne c'hellent digouezont e Paris nemet d'al lun, en deiz ma vez atao serret kovi ar pesket (les halles) ha me ne gaver ket a brenourien bras.

Kement-se n'eo ket dies da goupren ; ar brilli paket euz a zadorn da zul n'o deus ket a dalvoudegez evel ar re paket en nosveziou all, n'int mad nemet da goll ar verz.

Ra vezo gullet eta epad ar c'hampagn brilli ar vartoloded o chom en aod d'ar zadorn hag o tont d'an offeren d'ar zul, gant kement ha muioc'h zoken a aket eget er mareou all euz ar bloas, evit ma c'hellint trugarekaat Doue evit ar besketerez o deus bet, ha goulén he vennoz evit ar zizun a goumans.

Darvoudou c'hoarvezet gant listri a vrezel.

N'eus ket c'hoas goall bell, kerkent ha pa veze peur'hreat eul lestr a vrezel, e veze dioc'htu benniget gant eur zolanite vras. Ar belek, araok teuler dour benniget a rea ar beden-man : « Pli-jet ganeoc'h, va Doue, selaou hor pedennou, ha benniga al lestr-man gant he ekipaj evel m'o peus benniget arc'h Noë evit kerzet var an dour diluc'h. Roit an dorn d'ar vartoloded evel m'o peus roët da zant Per var mor Genezareth. Digassit eun eal euz an Env, ha kargit anezhan da veilla var ar vatimant, d'he zenna euz an holl danjeriou ec'h en em gavo enno, evit ma c'hellou ho servicherien mont gant ho hent, trec'hi ho

enebourien, ober mad ho zervich ha distrei laouen d'ho forz mor ».

Al listri a veze benniget, hag en ho bourz e veze lavaret ar pedennou.

Mes ar Franc-Masounet ne voant ket evit gouzanv ar c'hiziou kristen-ze hag o deus ho zaolet d'an traon evel traou hag a ra mez d'an dud desket euz an amzer a hirio. Var ho meno ar vartoloded o deus deskadurez aoualac'h evit gouarn ho-unan ho listri, ha n'o deus ket a ezom da c'houlén na sklerijen, na skoazel digant Doue.

Mes petra a veler siouaz ! Daoust a guelloc'h e ia breman an traou er *Marine* abaoe ne vez ket benniget al listri na lavaret peden ebet enno ?

Nan, morse ne z'eus bet gullet kement all a zarvoudou o c'hoarvezout gant ar batimanchou eget breman. Ne glever mui komz nemet euz listri eat d'ar strad, taolet var ar c'hostez, abor-det, draillet ; euz martoloded lazet pe c'houllet dre beb seurt avariou all.

Poent eo distrei d'ar mod koz : benniga al listri ha lavaret ar pedennou bemde en ho bourz.

Socialistes en paroles.

Dialogue surpris entre un communiste et son disciple, auquel il vient de prêcher la bonne parole.

Après un temps de silence.

Le disciple. — Ainsi, ami Socio, si tu avais deux maisons tu m'en abandonnerais une ?

Socio. — Bien sûr.

Le disciple. — Si tu avais deux millions, tu m'en passerais un ?

Socio. — Bien sûr.

Le disciple. — Et si tu avais deux cigares, tu m'en donnerais un ?

Socio. — Pour ça non !

Le disciple. — Tiens ! Pourquoi ?

Socio. — Parce que j'en ai justement deux dans ma poche.

Ian Lounk-he-Zizun.

An noz a ioa tenval ; an avel a glevet o voudal hag soutal er meaz.

En eur lochen zister dare da gueza, eur vamm baour c'huec'h kraouadur en dro d'ezhi o c'houlén

bara, a c'hed he goaz da erruout er gear. Sonet dek heur ha kelou ebet. Setu hanter-noz, pried ebet ato. Sonet div-heur, den ne errue. Ar chreg baour a oa azezet var an oaled, he bugaligou en he c'hichen. Ne doa ket guellet ho c'hass da gousket : naoun du o doa ! Krena a reont yar an oaled e kichen an tan a ia da vervel dre n'eus ket a geuneut da lakaat enno ; eun tammik goulaouen roussin a zo er siminal. Nag ar vamm nag ar vugale ne leveront ger. Gortoz a reont... Pe seurt buez !

Erfin e tigoues an ozac'h ! Eur c'hofad a zo ganthan.

Ar vugaligou, lavaret d'ezho o dije bara pa erruje ho zad er gear, en em laka raktal da grial : « Bara ! Bara, tad ! Bara » !

« Bern sklabez ma z'oc'h, eme an tad, peoc'h, pe bremaik me a velo ! » Ar vamm a fellas d'ezhi difen he bugale. O truez ! Raktal he goaz, ar sakreou en he c'hinou, a beg enno dre ar bleo, a ra eun dro ganthi var leur an ti. Taol botez dioc'h an tu-man, taol botez dioc'h an tu-hont. Skrijuz oa beza en ti-ze : kri ar vugale, eat da guzat, lod dindan starn an daol, lod all dindan ar gueleou ; huanadenno ar vamm taolet ha distaolet evel eun torc'h-skudili, an tonerdeou brassa o nijal dre an ti !

Ha possubl eo, m'her goulén, guellet netra krissoc'h ? anavealed gouez n'int ket ker foll-ze !

Mes siouas ! evelse ema. Eun den boazet da c'haloupat an hostaleriou n'en deus ket kalon ebet. Ne zonz nemet en he gov hag er banneou a dle he garga. He vuez a zo eno, hag eno ebken.

Lavarit d'an den-ze, e ra glac'har he dud oc'h ober ar-pez a ra, e koll fortun he vugale, e stago eur zac'h-ouz ho c'hein evit mont da glask ho bara : Amzer gollet !

Guellet a ra he vamm o lenva, he dad oc'h huanadi, he bried o tizec'hi var he zreid, he vugale o c'houlén bara : Van ebet ne ra.

Gullet a ra he zanvez o teuzi, anaout a ra memes n'eus ken koz a-ze nemet he dech evit ar boessoun ; c'hui a gaf d'eoc'h marteze e c'hellou ar guel euz a gement a gollou dizrei an den-ze ; fasia a rit ; an den-ze a gendalc'ho da eva.

Bez truez oc'h da dud, a lavaro d'ezhan eur mignoun bennak ; sonj e teus eun ene da zavetei, buez da vugale da zouten hag eur pried da garet ! Labour nul ; rei an deveriou-ze da goupren

d'ar mesvier a zo diessoc'h eget na deo ober da eur bugel lenn araok m'en deus desket preg.

Malloz eta d'an tiegez a zo eur seurt den en he benn !

• Malloz d'ar c'hreg e deus anezhan evit pried ! Malloz d'he vugale ! Ne zell ket outho, ne ra van evit ho c'hlevet o iudal gant an naoun. He gov direuz, hennez a lounk tout, daelou ha goad greg ha bugale.

Ar bleizi er c'hoajou a glask boued d'ho revian. Ar mesvier er c'hontrol, gant ma vezo leun he gov, ne ra forz euz a hini ar re all.

Ne losk ket memes he vugale da c'houlén diganthen eun tamm bara.

An didruez ! an digalon ! an dinatur !

EUN IFERN A ZO

Hi ! Daoust a c'houi a zo bet enno o velet, a lavaro eun doktor bennak a gav dezhan beza *invantet ar zouben rous*, var zigarez ma oar penaoz daou a daou ra pevar.

Nan a dra zûr, var mignoun, peguir emaon aman, rak den ne deu ac'hano ; ha c'hui ma rankit mont di da velet ha geier a gountan d'eoc'h ne c'helloc'h ket dont er meaz ken nebeut. Mes gouzout a c'heller heb beza gullet ; e muioc'h a draou zoken e kreder ha n'hor beus morze gullet, eget e traou hag hor beus gullet. Me zo sûr e kredit oc'h eus eur spered bras, ha goulskoude na c'houi na den all ebet n'en deus gullet anezhan.

Holl guirioneziou an histor oc'h eus desket er skol a zo harpet var lavarou an dud, ha c'houi goulskoude a gred anezho ; deread eo deoc'h eta kredi ive ez eus eun ifern peguir holl boblou an douar a unan a lavar deomp ez eus unan.

Mes ne ket ebken dre lavarou an dud e c'houlzomp ez 'eus eun ifern, er gouzout a reomp ouspen dre lavarou Doue he-unan.

Ia, me lakaio, mar kirit, va mignoun, oc'h eus c'houi oc'h unan hebken, muioc'h a spered hag a voueziegez eget n'ho deus bet holl assambles an dud desketa a zo bet biskoaz. N'euz forz, ar pez a livirit ne virit ket muioc'h beza selaouet evit kement-se, rak Doue he-unan en deus diskleriet ez 'eus eun ifern, hag eun *ifern eternal*. Ar pez en deus great pe lavaret Mab Doue epad m'edo var an douar a-zo skrivet en eul leor hanvet an

Aviel ; ogen n'eus guirionez ebet marteze merket sklearoc'h en Aviel, na menek anezhi aliesoc'h eget ar virionez-ma : Bez 'ez 'eus eun Ifern ha poaniou an Ifern n'o devezo fin ebet. Ama, a lavar Mab Doue, en eur gomz euz a stad ar bec'herien er bed all, e vezint krignet gant eur prenv ha ne varvo ket ha devet gant eun tan ha ne vougo morse. Ahont, en eur gomz euz ar varn jeneral e lavar e vezo douget ar setans-ma eneb ar re fall : « It tud milliget, it d'an tan eternal ». Ha goudeze e lavar adarre, en eur verka penaoz ec'h achuo ar varn : « Neuze ar re fall a ielo d'ar boan eternal hag ar re just d'ar vuez eternal ».

Deski a ra deomp c'hoaz e meur a leac'h en Aviel hag dreist holl e parabolen Lazar hag ar falz pinvidik eo guir ez euz eun ifern.

Bez 'ez 'oa eun den pinvidik bras, guisket kaer ha maget a bep vella. Bez 'ez 'oa ive eur paour keaz, he hano Lazar, hag a ioa he gorf goloët a c'houliou. Hogen dont a reas ar maro d'ar paour keaz-se hag he ene a oue douget gant an Elez d'al limbou e koumpagnunez Abraham. Dont a reas ive ar maro d'an den pinvidik hag he ene a oue stlapet en Ifern. O veza savet he zaoulagad, epad m'edo o leski e kreiz tan an Ifern, e velas a ziabell Abraham, ha Lazar en he gichen. Ha setu hen da grial : « Tad Abraham, digassit Lazar da zouba penn he viz en dour evit refreski va zeod eun tammik ». Mes Abraham a respountas : « O pet sonj peger mad oa ho toare epad m'edoc'h var an douar ha peger fall oa neuze hini Lazar ; brema Lazar a zo er joa ha c'houi er boan : peb hini d'he dro eo ! Ouspenn-zo, ac'hann d'al leac'h m'emaoc'h ez 'eus keit ma n'ema ket e galloud den mont ac'hann di, pe dont ac'hano ama. »

O mignoun difeiz a c'hell lenn ar skrid-ma, me zo sûr, e deus ar barabolen kaer-ze tenereat meur a veach ho kalon epad ho pugaleach, setu perak e reketan e teufe c'hoaz d'ho lakaat da zisken ennoc'h hoc'h-unan ha da ober deoc'h dizrei ouz Doue ho pask kenta. Na pegen eurus oac'h neuze ! Mad, an eurusted-se a c'hellit c'hoaz da gaout : n'oc'h euz nemetselaou ho Mammzantel an Iliz a lavar deoc'h en he lidou sakr : « Setu amzer ar zilvidiguez » ! Ouelit eta var ho pec'hejou hag it d'ho diskleria d'ar belek a roio deoc'h ar pardon anezho en hano Jesus-Christ. Ha neuze, e mare ma kano an Iliz an *alleluia* var he

fried savet leun a c'hloar euz ar bez, oc'h ene ive savet euz maro ar pec'hed da vuez ar c'hras, a gano da zeis Pask, *alleluia* ar resurrection, kantik a joa hag a beoc'h.

Mignoun, evit kredi ez 'eus eun Ifern na c'hortozit ket beza kouezit ennhan, rak neuze siouaz ! e vefe re zivezad !

LEURS RENGAINES

— *Les Religieux sont les ennemis du progrès.*

Blagueur ! Et c'est à eux qu'on doit la civilisation ainsi qu'une foule de découvertes dans les sciences, de chefs-d'œuvre dans les lettres !

ACTES PAROISSIAUX

Gulvinec.

Baptêmes :

- 17 Février. François-Marie Le Moign ;
- 18 — Eugène-Marie Guéguen ;
- 19 — Marcelle-Marie Lossouarn ;
- 20 — Marcellin Biger ;
- 21 — Louis-Corentin-Noël Biger ;
- 22 — Marie-Philomène Jolivet ;
- 23 — Germaine Le Goff.

Mariages :

- 25 Février. Louis Souron et Marie Joncour ;
- 26 — Louis Le Gall et Anna Stéphan.

Décès :

- 11 Février. Anonyme Le Moign ;
- 12 — Stéphanie Lossouarn, 45 ans ;
- 12 — Urbaine Le Goff, 21 ans ;
- 15 — Mathilde Moullec, 5 mois.
- 16 — Marie-Jeanne Guéguen, 12 ans ;
- 22 — Elisabeth Morvan, 4 ans.

Treffagat.

Baptêmes :

- 14 Février. Augustine-Marie Nédélec ;
- 15 — Hervé-Marie Le Berre.

Décès :

- 12 Février. Anonyme Le Pape ;
- 16 — Marie-Jeanne Le Moign, 13 ans ;
- 16 — Françoise Jaouen, 85 ans.

Le Gérant : P. DURAND.